

AR BLEIZI

Pezig-c'hoari en eun arvest gand Per Derug

embannadur kenta “C’hoariva ar Bobl” 1935

« An eostou ‘m-eus bet dastumet ha dormet, tra-walh ‘vefe da vaga eur gêr vraz ‘pad bloaz...

Allaz !... ‘Neus ket chomet ganeom tra-walh evid nompas mervel gand an naon !
»

(An Hini Koz).

Eur gerig a-raog

Kredet e vefe, da genta, penaoz n’eus kaoz ‘barz an tammig pez-c’hoari-mañ nemed euz traou c’hoarvezet en amzer goz hag en eur horn gouez ha yen euz eur vro bell bennag...

Ha koulskoude, diazezet ema, siwaz, war wirionez an amzer vremañ en Breiz-Izel !

Gwall, gwall fall ‘ya an traou gand al labour-douar abaoe tri pe bevar bloaz ! Ar beizanted bihan a zo bremañ rivinet da vad, beteg ar re ‘noa lakeet eun neubeudig gwenneien a-gostez goude ar brezel.

Hag ar verourien, anezo an darn vrasa euz peizanted ar vro ! Eun druez eo ar stad ‘maint erru ! N’hallont ket ken en em denna, e mod ebed !

Kalz anezo n’int ket mui evid paea o gouel-mikêl. Hag ar re a hall dond a-benn da baea, red eo gouzoud penaoz : dre debri “boued-treud” e-pad ar bloaz, dre jom heb ober an dispignou reta evid o bugale hag evito o-eun... Nag a diegez ‘zo bremañ ma chomer heb lakaad amann war ar bara, evid kaoud muioh da gas d’ar marhad ! Beteg ar hig hag ar hafe ma ranker espern warno... Ha sellet e vez en diou wech evid lakaad ober eur re vontou nevez !

Ha kement-se evid galloud daspugn ‘barz ar pres an dornad billiji mil lur da gas d’ar perhenn evid e gouel-mikêl...

Na deuer ket aliez a-benn da zaspugn ar gont... Yann Verour a rank neuze goulenn eun dale, pe eun tamm rabat... !

Red eo lavared penaoz an darn-vrasa euz ar berhenned a zo tud hag a gompreñ.

Med reou all a zo hag en em ziskouez evel tud dinatur, digalon.

Hag an dra-mañ eo a zo red lavared amañ ive :

Gwelet e vez bremañ war ar mēz taolennou evel ma ‘z eus er « Bleizi »...

Ya, er bloavez pemp-ha-tregont-mañ, beza ‘zo – en parreziou ha ne dalv ket deom merka amañ – tiadou tud, taolet kuit euz o flasou, hag a zo bremañ o veva e barakennou ‘barz ar hoajou, ha labour ebed dirazo !

Ha ne gonter ket mui ar verourien a zo bet gwerzet dezo kement tra hag eet bremañ da louedi ha da stleja o mizer ‘barz ar hériou !

Hucho warnom neb a garo ar pez a garo !

N’om ket foultre kaer gand ar rebechou a vo taolet deom !

Plijoud ‘raio « Ar Bleizi » d’ar bobl, sur eo ! Gand ma raio e dammig hent dre ar vro, c’hoariet ‘barz ar barreziou bihanna :

gand ma vo paz kenta eur « c’hoariva boutin » breizeg,

setu or c’hoant kaerra, ha poania ‘raim evid ma teuio da vad.

En eur ober ze, labouret mad ‘vo bet ganeom, d’or zoñj, evid ar Brezoneg !

Per DERUG.

En eur vro bennag euz an Hanternoz, ‘kreiz ar hoajou.

Diabarz eul lochennig.

Liou an dienez ha c’hwez ar baourenteze gand kement tra enni.

Eur houlaouenn o tevi war an daol.

Pa zav al lien, ema an hini koz azezet war eur skabell, e benn gantañ etre e zaouarn.

Hi ‘zo oh echui rei eur skubadenn d’an ti...

Ar wreg

Ar mab ‘ma ket erru c’hoaz.

An hini koz

(*Heb sevel e benn*). Ya, diwezad eo dezañ. Gwall bell e chom fenoz...

Ar wreg

Kavet ‘no bet eun tamm labour bennag marteze.

An hini koz

Marteze, marteze... Me ‘garfe mad... Med n’eo ket sur tamm ebed !

Ar wreg

Diêz ‘vez dezañ kaoud labour neb leh bremañ...

An hini koz

Bremañ... abaoe ‘n-eus an Aotrou taolet ahanom ‘mēz on flas, den ebed n’eo deut war zikour deom...

Ar wreg

Nann... abaoe ‘maom amañ, er hoz lochenn fall-mañ, ‘kreiz ar hoald-braz... n’eus deut deom sikour digand nikun ebed ! Hag ar wall-blanedenn he-deus skoet adarre warnom... Maro gwreg ar mab... hag he bugelig kêz ‘zo eet kuit war he lerh...

An hini koz

Maro int amañ gand ar vizer kentoh ‘vid gand an naon...
(Selled ‘ra eur pennadig deuz an hini goz).

Ha me... oh echui ‘maon-me ive... Heb dale, erruio fin din... ‘m-eus ket pell ken d’añduri...

Ar wreg

Chom peoh ‘ta !

An hini koz

Me ‘oar mad, me, petra ‘lavaran... Tostaad ‘ra an eur din... ‘Vo ket re abred ! N’on ket mad da wall dra ken...

Ar wreg

Ha piou ‘nefe laret ‘vefem eun devez erru evel ‘maom ganti bremañ ?... (Hag e klemm).

An hini koz

Poaniet a-walh on-eus bet greet koulskoude... Kaled om bet deuz al labour... n’om ket kontet or c’hwezenn... Kousket diwezad, savet abretoh evid an heol, da staga ganti kerkent hag an deiz... Nag a ed ‘zo bet hadet gand ar bizied-mañ ! nag a winiz ‘zo bet paseet ‘tre re-daouarn-mañ... An eostou dastumet ha dornet ganto, peadra ‘vefe da vaga eur gêr vraz e-pad bloaz... Allaz !... N’eus ket chomet ganeom tra-walh evid nompas mervel gand an naon !

Ar wreg

(Rust). N’eo ket just !

An hini koz

(Goustad, hag evel pa veze kollet en e zoñjou). N’eo ket just !... N’eo ket just !... Chom ‘ta ! Ar pez ‘zo just pe ‘ma ket.... ze na zell ket ‘z ouzom bremañ...

Va zad paour – Doue d’e bardono ! – pa oa o vond kuit diouti – gwall bell ‘zo abaoe, a lavaras deo : « Eur vagerez vad eo an douar... N’on ket deut a-benn, me, da gaoud eun tamm anezañ, a lavare... med c’hwi, marteze, dre forz poania, e teufoh da baka eun nebeud parkou, a vo deoh hoh-unan... hag a zigaso êzamant deoh neuze... »

Ar wreg

Allaz !...

An hini koz

An hini koz a zoñje fall... Greet ‘m-eus evel ma lavare... poaniet, ha c’hwezet, ha ‘n em brevet e-pad bloaveziou... e-pad eur vuhez ! Ha n’on ket erru a-benn gwelloh evid an hini koz... hag ar re all en e raog !... Falloh, zoken, falloh !...

An Aotrou, evid eun toulladig peziou aour – nag a yalhadou ‘m-eus bet dastumet evitañ koulskoude ! – ...evid lodenn diweza al lizer-feurm, chomet war-lerh ar bloaz-mañ, ker fall ma ya an traou... taolet om bet war ar porz... riñset om bet ‘mêz an ti-ze a garen kement, evel pa vefe bet din-me, e gwirionez... keid-all ‘zo oam ennañ... Ha greet ‘n-eus an Aotrou gwerza on zraou, meubchou hag all...

Ar wreg

...Or paour -kêz peadra paour ! ...

An hini koz

...Eüruz deom beza deut a-benn da gaoud ar hoz lochenn fall-mañ, renket gand ar mab... amañ ‘kreiz ar hoajou gouez... da waskedi ahanom deuz an noz, ar gwall-amzer... hag ar bleizi... Amañ he-deus kavet ar verh-kaer eun tamm gwele plouz, hag eun doenn, ‘vid kaoud he bugelig... ha mervel da houde... evel eur gïez !

Ar wreg

Kiez an Aotrou... bravoh ‘vezdezi evid deom-ni !...

An hini koz

(*Kenderhel a ra gand e zoñj, ha kreñvoh-kreñva tre ma ‘z a*). Ne lavarin ket evel an tad... Gand an douar n’eus netra da hounid... (*Randoni ‘ra bremañ*). Selaou, maouez, en kenkaz ‘vefe ket distag a-walh va zeod ken da gaozeal dezañ pa erruo en-dro... te... lavar d’ar mab... kreñv eo... kalon ‘zo gantañ, ne gil ket dirag al labour... lavar dezañ penaoy pa ne vin mui...

Ar wreg

Chom peoh ‘ta !

An hini koz

Pa ‘vin ket mui... dezañ mond en kér... diskouez e zivreh... ‘vo ket greet fae warno... kaled int... Du-ze e hounezo e vara... e-leh chom amañ da zastum aour d’eun aotrou bennag... Arabad chom dre amañ... fall eo an douar... fall eo !...

(*Klevoud a reer ar bleizi o yudal, a-bell*).

Ar wreg

Selaou... selaou ‘ta...

An hini koz

An avel ‘ni eo... ar gwall-amzer...

Ar wreg

Klevoud ‘ran an amzer – med bleizi a glevan ive ! bleizi...

An hini koz

(*Evel oh huñvreal*). Bleizi... bleizi...

Ar wreg

Hag ar paotr a zo en hent bremañ, sur a-walh... na fuzul, na sort ebed gantañ d’en em zifenn ! (*Mond a ra-hi goustad beteg ‘kichenn an nor*).

An hini koz

Anavezoud ‘ra ar hoajou. ‘N em ziwall mad a oar. Hag ouspenn...

Ar wreg

(*O troha dezañ*). Klevoud ‘ran eun den o vale... (*goude eur pennadig*). ‘Glevan ken... A ! an taol-mañ...

(*Digeri ‘ra an nor hag ar mab a lamm e-barz an ti*).

Ar wreg

(*O tond dirazañ, hag eñ serri an nor dioustu war e lerh*). A ! ‘benn ar fin, te ‘ni eo !... Krena ‘reen dre ‘m horv... Ar bleizi...

Ar mab

(*O skei taoliou-treid d’al leurzi hag o strilla e vantell*). ‘Maint e-barz ar hoad, med en o raog ‘oan-me.

An hini koz

(*O tistaga goustad, aon o krena en e vouez*). Ar blei...zi...

Ar wreg

Malloz d’ar re ‘n em gavo war-lerh.

Ar mab

(*O tispaka eun dorz-vara euz dindan e vantell. Hag o kinnig anezi d'an hini goz.*). Mamm, setu bara

Ar wreg

(*Souezet eun tamm ha laouen war eun dro*). Ha kavet ‘peus ‘ta eun ene mad bennag ‘n-eus bet truez ?

Ar mab

(*Krak*). N’eus ket eneou mad e-touez an dud ken, nag a druez, va mamm... Pep hini ne zoñj nemed ennañ e-unan...

An hini koz

Bara ‘teus bet gand unan kennag koulskoude ?

Ar mab

(*Ken krak ha diaraog*). ...Kemeret ‘m-eus anezañ !

An hini koz hag Ar wreg

(*Asamblez*). Kemeret ‘peus anezañ ?

Ar mab

Ya... eet oan da weled ar merour nevez, gand ar zoñj ‘gavfen eul labour bennag d’ober marteze... Evid beza deut mad d’an Aotrou, laosket ‘n-eus ar chas war ma lerh. Med ar chas a anaveze ahanon... gwelloh int evid an dud... lipet o-deus din va daouarn. Greet ‘m-eus ar mod da vond kuit. C’hoariet ‘m-eus an dro d’an ti, dre ‘dreñv ar harz. Erru on e-tal prenest an apanti... Digor braz e oa... An dud ‘oa e penn all ar porz, e-barz al loch... Eun dorz vara oa war ar prenest... bara fresk... Kroget ‘m-eus buan e-barz... ha setu...

An hini koz

(*O sevel*). Greet fall ‘peus !... Laeret...

(*An hini goz ‘zo souezet gand ar ger-ze, kement hag ar mab*).

Ar mab

Laeret ?... Laer on-me ?

An hini koz

(*Oh azeza en-dro*). Na zebrin ket, me, deuz da vara...

Ar mab

Naon ‘m-oa... na c’hwi ?... ‘M-eus kemeret nemed a-walh evidom da derri on naon... Ha ne dleont ket muioh evid eun dorz vara deom, ar re-ze ?...

An hini koz

Greet fall ‘peus... Traou ar re all n’eo ket deom-ni ez int...

Ar mab

Ne gav ket din ‘m-eus greet fall, va zad, nann, tamm ebed...

An hini koz

Nann... fall eo da zoñj... Ar vizer, an naon, ar pez a welez amañ, an trubuillou a zo kouezet warnout-te ha warnom-oll, kement-se a ampech dit soñjal just...

Ar mab

(*Souezet*). Ha ne dleer ket en em zikour ? Ha ne oa ket dleet d’ar re-ze ha ‘deus kemeret on flas, sikour ahanom muioh ‘vid n’eus forz piou all ?

An hini koz

Dleet eo... Ya, dleet eo en em zikour... Ha gwaz-a-ze d’ar re na reont ket... Med n’om ket evid cheñch penaoz ‘ma an dud !

(*Ar mab a zo azezet en tu all d’an daol, an dorz-vara stlapet dirazañ. Eur pennad amzer, hag e houllenn an hini koz :).*

An hini koz

Nag ar mestr ?

Ar mab

(*Gand sevel e zorn*). A ! hennez !...

Ar wreg

Petra ‘n-eus lavaret ?

Ar mab

(*O konta, Ha nerzuz*). O vond en kér e oa. Pres ‘oa warnañ. N’eo ket chomet pell ganin...

« Ober ‘ran evel ma karan ober, a lavare... mestr on war ma douarou... Lakeet ‘m-eus ahanoh da vond kuit evid rei ar plas da dud all... Droad em-oa, petra ‘peus da glemm ?... »

Pedet hag azpedet ‘m-eus anezañ... kaozeet deuz truez... ha deuz ouzoh-c’hwi, e zervichourien goz... ha deuz ar goañv... deuz ma gwreg paour hag an hini vihan maro amañ gand ar riou hag an naon... – « Ma droad e oa, a lavare-eñ, ma droad e oa !... » N’ouie ket respont netra all din... Hag evel ma talhen da houllenn truez, greet ‘n-eus planta ahanon ‘mêz... O ! sell !...

(*Gwaska ‘ra e zorn, droug ennañ o soñjal en dra-ze*).

(*Ar vamm a ra eur jestr ive*).

(*Kenderhel ‘ra ar mab, dre jeñch ton avad*).

Ar mab

Ha kement-se, dre ma faot ‘ni eo, evid eun tamm mad !... Ya, dre ma faot !... Me ‘ni zo koz... setu ‘m-eus klevet du-ze, gand ar re all... Me houl’ pardon diganeoh, va zad...

Ar wreg

Ha deuz petra 'ta vefe kaoz, 'z eus bet laret dit ?...

Ar mab

Ya, kaozeet 'm-oa kaled deuz ar mestr ha dezo oll, deiz ar werz... c'hwi 'oar... komzet re galed deuz seurt tud. Gopet 'm-oa n'oa ket just ober e-giz-se d'eun tiad tud paour... hag e oa eur vez... hag e teufe keuz dezo da houde... Neuze, soñj ho-peus, va zad, eet 'zo droug en Aotrou hag e-neus lavaret ne oan nemed eun divergont, eur penn-fall hag eun haillon !

An hini koz

Ablamour da betra 'poa komzet ?

Ar mab

(*Souezet braz gand ar gouleñn-ze ; rust ha kreñv*). 'Blam' da betra ?... Pa oa savet din va gwad en em feultrin o weled ahanoh taolet war ar porz... c'hwi, erru d'an oad emaoh, lakeet 'mêz an ti-ze, an ti-ze 'leh m'eo maro on zud-koz, leh 'maoh ganet... c'hwi, lakeet da vond kuit diwar an tamm douar-ze ho-peus bet aret, troet ha distroet 'pad bloavezioù, evid gounid arhant ha pinvidigez ha ne oa ket evidoh... a oa evid hennez ha...

(*'Ma ket evid mond pelloh, gand an droug 'zo ennañ*).

Ar wreg

A ! ma vefe bet beo an Aotrou koz !

An hini koz

Ya... mad oa hennez... Med cheñch a ra an dud... Ar mab n'eo ket evel e dad.

Ar mab

(*Dicheg*). Ar baotred n'int ket evel o zadou, gwir eo ! Me, kennebeud, n'on ket eveldoh, va zad... Me, biken 'mefe gallet anduri ar vuvez chatal, ar vuvez loen-samm ho-peus bet... Biken, namm !... (*Sevel a ra*). An den-ze, greet mad 'n-eus... greet mad evitañ... teurel ahanon kuit bremaig... 'Vefen ket bet evid chom pell dindannañ, ha plegi, ha senti didrouz... Med c'hwi, lakaad ahanoh 'mêz, goude keid-all amzer war an douar-ze... e zouar dezañ, evel ma lavar !...

An hini koz

Rezoni 'rez... ha rezoni fall !... An Aotrou 'zo an Aotrou : e vadou 'zo dezañ ; e diez hag e zouarou, mestr eo warno, ober 'ra ar pez a blij dezañ ganto, ha rei anezo da biou a gar... Plijet 'zo gantañ rei e feurm d'eun all... e droad rik e oa...

Ar mab

(*Kriz*). E droad hervez al lezenn...

Ar wreg

Lezenn an dud digalon...

An hini koz

Al lezenn eo memez tra ! Nemed fall eo bet an Aotrou... fall... ya, fall !

Ar mab

(*En e zao dirag e dad, hag o sellé eeun warnañ*). N'om ket deuz ar memez amzer, va zad. C'hwi 'zo deuz eun amzer ma ne grede ket an dud sellé uhelloh evid beg o zreid... ma n'halle ket zoken Yann Gouér paour soñjal sevel e vouez, na ranna eur ger... Bremañ, tra-walh 'zo gand ar re yaouank, ha beteg re... Sevel 'reont o fenn... ha sellé... ha kompreñ ! ... Ne fell ket dezo chom ken da boania ha d'en em uza evid ar re vraz, ha rankoud tevel dirazo c'hoaz !... Skuiz 'int o klemm en kuz !... Komprenet eo ganto o-deus ar re goz en o raog padet re bell amzer o stoui, hag oh en em vreva, hag o chom peoh !... Noblañsou hag aotrouien, markized ha bourhizien, oll mistri braz an douar, abaoe kantvedou e vezont o veva buvez-kaer hag o kemer o flijadur war goust labour ha mizer ar re baour... Bara hag êzamant d'al labourerien, ha d'an hini pinvidig d'ober kovadou gand e beiou aour ma kar chom heb labourad ! Erru vo heb dale ar poent ma vo greet an tamm cheñchamant-se er bed direiz-mañ... Ar bed a dro, va zad... an amzer -vremañ 'ma ket evel hini gwechall... (*O hejal e skoaz*). N'hallom ket rezoni er memez mod, va zad !...

Ar wreg

(*Trumm*). A ! an Aotrou !...

An hini koz

Daoust hag eh ez da gomz evel ar paotr ? Gouzoud mad a rez, te... an Aotrou... ar mestr eo !

Ar wreg

(*Dioustu*). Evid mestr, mann ebed ken warnom !

(*Bleizi a glever adarre*).

Ar wreg

Ar bleizi ! (*Sevel ra, hag e chom da zelaou, en eur zelled war-du an nor*).

An hini koz

Brao eo deom beza gwaskedet gand eun amzer evel hemañ... Gweloud a rez, maouez, pa houzañver, dao ‘vefe bepred soñjal e hellfe erruoud deom kaoud gwasoh mizer c’hoaz...

(*Yud ar bleizi a vez klevet tostoh*).

Ar wreg

Selaouit... Eur spont klevoud anezo.

An hini koz

Ken na vo deiz ‘eont da hopal e-giz-se...

Ar wreg

(*O tostaad deuz an nor, ha selaou*). Me ‘gav din klevoud...

Ar mab

Klevoud petra, va mamm ?

An hini koz

Klevoud petra, ‘ta ?

Ar wreg

(*Oh ober dezo rei peoh*). Selaouit ‘ta !

An hini koz

‘Benn arhoaz, vo kontet an deñved...

(*Kriadennou a glever, a-bell*).

Ar wreg

(*A zo chomet diflach abaoe, ‘tal an nor*). Chomit peoh ‘ta !... Bleizi a glevan... med kriadennou a glevan ive...

(*Mond a ra ar mab tost deuz an nor, oh astenn e skouarn. Bremañ e klever mad mouez eun den o houenn sikour, o hopal forz e vuhez*).

An hini koz

(*O sevel*). Ha klevet ‘peus ?... Eun den ‘zo e dañjer !

(*Ar mab a dap krog en eur pez tamm koad, e korn an ti, hag e teu gantañ etrezeg an nor*).

Ar mab

Mond a ran...

Ar wreg

(*O stanka dezañ e hent*). Diod out ?

Ar mab

Leskit ahanon da vond, va mamm, goul’ a reer sikour... Dleet din mond !

Ar wreg

Ne di ket ‘mêz !... A-walh or-bez gand or mizer on-eun !

Ar mab

Va mamm, leskit...

Ar wreg

Daoust ha petra ‘hellfes ober ? Ar bleizi ‘zo berniou anezo... n’eus netra d’ober, ‘lavaran dit !... Amañ eo, eo dleet dit chom... gand da re goz...

An hini koz

An dud ‘zo dleet dezo ‘n em zikour...

Ar wreg

(*O trei en eun taol war-du an hini koz*). Ha sikouret om bet, ni, gand unan bennag ?

An hini koz

Med...

(*Klevoud a reer, frêz-tre, tost d’an nor, goulenn digor*).

Ar vouez er-mêz

Olla ! peizant, digor, digor ‘ta !

Ar wreg

O !

(*Ar mab a lamm d’an nor hag a zigor*).

(*An Aotrou a zaill e-barz an ti, liou ar spont warnañ*).

An Aotrou

Ar bleizi ! ar bleizi war ma lerh... Stankit... serrit an nor !

An hini koz

(*Oh ober digemer heb anaoud anezañ*). Solud eo... arabad deoh kaoud aon...

(*An Aotrou a zo deut e keit-se e-kreiz an ti, strilla ‘ra e vantell. Dialanet eo*).

Ar wreg hag Ar mab

(*Asamblez, oh anavezoud an Aotrou*). An Aotrou !

An hini koz

(*D’o heul*). An Aotrou !

An Aotrou

(*Kenderhel a ra heñvel, heb anavezoud peleh ‘ma. Komz buan a ra*). Ma jao ‘zo kouezet dindannon... Ar bleizi ‘oa erru warnon dija !... An ti-mañ... saoveteet on !...

Bremañ ‘maint o trailla va jao hag o tebri an tammou... Gras deoh, tud vad, setu-me saoveteet... saoveteet...

Ar mab

(*Kri*). Saoveteet ?

An Aotrou

(*Oh anavezoud anezañ hag oh ober eul “lamm-penn”*). A !... c’hwí ‘ni eo ?...

Ar mab

(*Heñvel*). Ya ‘vad !... Ha gweloud ‘rit ti piou emao d’an eur-mañ ?

An Aotrou

Ti...

Ar mab

Gweloud ‘rit ti piou ?

An Aotrou

Med...

Ar mab

En va zi-me... just ‘n em zi-me !... Klevoud a rit ?... Ti an hini ho-peus lakeet ‘mêz ho maner en abardaez-mañ... Ti va zad... va zad ho-peus plantet er mizer-du, en dizesper, gand an naon, gand ar hleñved krog ennañ bremañ... tost dezañ e fin martexe...

An Aotrou

Med...

Ar mab

(*O hoapaad kriz*). Red eo deoh beza diskiant mad evid dond dirazom bremañ... amañ !

An Aotrou

Med...

Ar mab

Ma ! va zro ‘zo bremañ (*kreñvoh-kreñva*), va zro din... va zro din-me... Klevoud a rit : teurel ‘ran ahanoh ‘mêz ive !

An Aotrou

Med... bleizi ‘zo ‘mêz... Dao eo deoh...

Ar mab

(*O hoapaad adarre*). A ! bleizi ‘zo ‘barz ar hoad ?... Med aon ‘pefe, c’hwí, deuz ar bleizi ? Diod eo deoh... Anavezet e vefeh dioustu ganto evid beza eur hoñsort dezo... Ar gomzenn goz, c’hwí ‘oar, a lavar penaoy n’en em zispenn ket ar bleizi etrezo... Mond a

reont d'ober eun tamm ambroug deoh... Nemed na dehfent kuit dirazoh... pa ouzont oh falloh ha krisoh evito !...

An Aotrou

(*O 'n em drei war-du an daou goz*). An den-mañ a zo sod !

Ar mab

Gouzoud a rit e komzan mad !... Arsa ! petra emaoh o hortoz 'ta ? Ha red 'vo din skarza ahanoh 'mêz, me va-eun ?... (*Hag a ra mod da vond dezañ*).

An Aotrou

(*Oh ober jestrou*). O ! med spontuz eo ! Sod mad oh, den yaouank !

Ar mab

Spontuz ! me n'onn dare, me, mar deo spontuz !... Hag evid sod, 'gavan ket 'vefen muioh evidoh p'oh deut en ti-mañ ! Ne gomprenan nemed eun dra : ober AMAÑ, 'n em zi, pez a garan ha mod a garan !... Droad am-eus pa laran deoh... An droad-se, c'hwi 'peus desket anezañ din... – c'hwi hoh-eun... ha n'eo ket pelloh evid fenoz... Mestr on 'n em zi, me ive, pa lavaran !... Plijoud a ra din kas ahanoh kuit. Petra 'peus da glemm ?

An Aotrou

(*O vond da houllenn truez*). Med ar maro 'ni zo o hortoz ahanon 'mêz !...

Ar mab

O hortoz ahanom e oa ive, an Ankou, war ar porz... du-ze !... Ha kroget 'n-eus bet ennom dija... Va gwreg yaouank hag he merhig paour, maro int gand ar vizer hag ar riou... en ti-mañ, Aotrou !... Hag an tad... (*O tiskouez anezañ gand eur zell*).

...Nag a bedennou or-bez greet, koulskoude... 'vid kaoud eun ti ha 'vid kaoud labour ha bara ! Ha gouzoud a rit mad peseurt respont 'zo bet greet deom... ha ganeoh hoh-eun e oa !... Kaoud soñj, Aotrou !

An Aotrou

N'eo ket posUBL !... N'oh ket evid ober an dra-mañ !... N'oh ket gouest... Ne fell ket deoh evid gwir... (*Balbouzad 'ra ar paour-kêz Aotrou*).

Ar mab

(*Gwall grak*). Ne fell din nemed eun dra, Aotrou... ma 'z afeh kuit, dioustu-bremañ, deuz an ti-mañ... a zo va zi din-me... ha savet ganin...

(*Bounta 'ra an Aotrou war-du an nor*).

An Aotrou

(*O klask komz d'an hini koz dreist skoaz ar mab*). Daoust hag e leski ober an taol-mañ... te hag a zo bet servicher va zad ha va hini ?

Ar mab

(*O 'n em facha da vad*). Leskit ar hoziad-mañ ! Emaoh o laerez dezañ e gomzou, rag gouleñn ‘ree ganeoh ive... n’eus ket ken pell-se c’hoaz... « Ha daoust hag e leskoh ahanon da vernel, heb eun doenn din... me hag a zo bet mevel gand ho tad ha ganeoh hoh-eun... e-pad bloaveziou ha bloaveziou ? »

An Aotrou

(*O klask tostaad ouz an hini koz*). Fañch koz, saov ahanon ! Lavar da volont... Kompren ‘ta : n’eo ket ‘vidon-me e houllennan truez diganit... Mar don bet kaled... ma bugale, int, n’o-deus greet droug ebed deoh... ‘maint bremañ o hortoz ahanon... N’oh ket evid distruja eun tiegez e-giz-se... Daoust ha...

Ar wreg

(*Trumm ha taer*). Distruja eun tiegez ? Hag ar verh-kaer, amañ, hag he bugelig, pesort droug ‘doa greet deoh ?...

Ar mab

(*O vounta an Aotrou adarre*). Alo ! ‘mêz !... ‘mêz !...

An Aotrou

Med...

Ar mab

‘Mêz !... Pa laran deoh, Aotrou !... ‘Mêz ‘ta !

An Aotrou

O ! med ‘n em zivenn a rin !

(*Lamma ‘ra an Aotrou beteg an daol hag e tap krog en eur skabell. N’e-neus ket amzer avad da zevel anezi : ar mab he sach digantañ ken buan all*).

Ar mab

Ya... ma vefeh ‘n hini kreñva ! (*O lakaad ar skabell ‘dreñv e gein*)... Ma vefeh ‘n hini kreñva amañ, greet buan ‘pefe teurel ahanom oll d’ar bleizi naoneg-mañ... evidoh da hounid amzer ha d’ober dezo tevel... ha mod-se êz deoh mond kuit, trankil, ‘benn warhoaz vintin !... Med an hini kreñva amañ... me ‘ni eo, Aotrou !... O trei-distrei an douar ‘baoe ma yaouankiz... o verad pri EVIDOH, Aotrou... ma divreh ‘zo deut kaled... Ho taouarn deoh-c’hwi, treud ha dinerz ‘int : n’ho-peus ket greet ganto nemed daspugn ha bernia ar peziou aour... gounezet deoh gand ho merourien... Arabad deoh klask goureñ, hañ ?... (*O vounta an hini all*). Alo !... Yao !...

(*Klask a ra an Aotrou paseal en tu all d’ar mab. D’an hini goz, hag o komz atao dre ziwar skoaz ar mab*).

An Aotrou

Maouez, ha n’ho-po ket truez ?

Ar wreg

O... me... Aotrou... n’on amañ nemed eur vaouez paour...

An Aotrou

(*Pa wel n'eus netra da hortoz digand ar vaouez, a 'n em dro adarre war-du ar merour koz*). War va daoulin e houllennan ganit, Fañch koz... Ober 'rin war da dro, me lar !... Kemer a rin ahanout en-dro gand da diegez...

Ar mab

Re ziwezad...

An Aotrou

(*Derhel a ra da gomz er memez mod, hag ar mab da stanka dezañ e hent*). Rei 'rin dit da blas en-dro... Lakaad a rin ahanoh da zond pinvidikoh 'vid n'ho-peus soñjet dond gwech ebed...

Ar mab

Re ziwezad...

An Aotrou

(*Komz a ra d'an hini koz atao*). Bez soñj 'peus gwelet ahanon o kreski... Va zad a gare ahanout kalz, rag eur merour feal ha labouruz e oas.

Ar mab

(*Kila ra eur paz en a-dreñv*). Hag e-noa greet deoh ho tad an traou da houzoud... 'Vefe ket lavaret...

An Aotrou

O ! daoust hag e vefeh oll ken didruez ?

Ar mab

(*Gand eur vontadenn all*). Me a faot din, Aotrou, ez afek kuit euz amañ, ha buan ! Eur wech all 'lavaran deoh... Kuit !... Yao !

(*Emaint erru o-daou tre 'kichenn an nor ; ar mab a astenn e zorn o klask digeri an nor dre 'dreñv kein an Aotrou*).

An Aotrou

O ! hag emaoh o vond da...

Ar mab

Mêz ahann pelloh !... 'Mêz, 'lavaran deoh !...

An hini koz

Chomit !...

Ar mab

(*Trei a ra war-du e dad hag e teu a-dreñv*). Va zad !

An hini koz

Chomit amañ ! (*Sevel a ra en eur lared* :) Ha te, va mab... na daol ‘mêz nemed an droug ‘zo savet ennout !... Maouez, serr an nor-ze...

Ar mab

Med, va zad !...

An hini koz

‘Lavaran dit : lesk anezañ da jom amañ... N’on ket, me, evid soñjal ‘veldoh... Ne fell ket din e vefe merket an tamm buhez diweza a chom ganin gand eun taol ken kriz hag ez eus bet greet din...

Ar mab

Daoust hag-eñ ho-pefe ankouezet kement tra, va zad ?

An hini koz

‘M-eus ket ! Soñj am-eus... hag a zalhin mad euz kement tra... Med deuz rummad ar re goz on-me, te ‘oar... N’on ket fall a-walh marteze evid hemañ... Marteze, ya, e vefe bet just ober dezañ tre evel ‘n-eus greet deom... (*Trei a ra deuz tu an Aotrou, a zo bremañ en eur horn*). Ya, Aotrou, va mestr gwechall... just e vefe marteze... planta ahanoñ ‘mêz ! Rak c’hwí ‘peus gwasket ha brevet ahonom, ni ho mevelien, ni hag a zigase deoh buhez diskuiz ha trankil hag êz ar re binvidig.

Ar mab a felle dezañ kas ahanoñ da gaoud ar bleizi... hag e oah eno o krena, Aotrou... o krena ‘vel eur hrouadur pennfollet hag o houlenn truez... Ma ! chom a reoh amañ evid an noz... N’eho ket c’hoaz gand ar bleizi... Ne dlefen ket ober ken brao deoh koulskoude... Med deuz rummad ar re goz on-me...

Bremañ, klevit mad ! ganin-me... gweled a reoh – ar soñjou koz a ya kuit, soñjou koz ar bobl paour hag a blege atao, hag a boanie, hag a hweze e-pad e vuhez evid maga ar vistri...

Ar mab

Echu eo an amzer-ze... pe tost d’echui. Ar rummadou nevez ‘deus komprenet ema ar bobl dindan ar beh abaoe re bell ‘zo... Ar re yaouank na badint ket da blega o chouk...

An hini koz

‘Vel m’on-eus greet, evel m’om bet sod a-walh d’ober, ni ar re goz, en o raog !

Ar mab

(*D’an Aotrou*). Ha petra reoh pa vo en em glevet toud al labourerien – re ar hériou gand ar re diwar ar mêz – micherourien ha peizanted dorn-ha-dorn, eneb d’an amprevaned ‘giz deoh-c’hwí !... Cheñchet vo penn d’ar vaz ‘raog na vo pell, me lavar deoh, Aotrou !... Ha neuze...

An hini koz

...Neuze... (*D'e vab*). Selaou, te... (*D'an Aotrou adarre*). Neuze, an dud seurt deoh n'eo ket dibenna anezo, pe o has da zebri bara-seh ‘barz an toull eo e vo d'ober... med rei dezo gounid o zammig kreun dre o hwezenn o-eun !... Ar binvidien lakeet da labourad ‘vel an oll... ‘vel o sklaved bremañ... setu pez a garfen gweled, me, an hini koz, ‘raog din mond kuit...

...Neuze ‘mo ket re a geuz da vezam ampechet eun Aotrou a lignez vraz, kollet dre ar hoad, da vond da voueta ar bleizi !

ECHU AR C'HOARI